

294

Chanson an Amseriou nevez

Composet gant eur Soudard yaouanq a
barres Commana, aroc msnt de regimant
(er bloavez 1894).

KENTA COUPLET

Ma mije bet an talant da guindui va fluen
Vel guechal an den savant e ano Lafonten
E labourou immortal a dreus an amseriou
Vezo guelet deus a bel partout dre ar broiou.

Me a houlen aneza dam entcha roc avans
Gant ar sperejou brassa deus enoret ar Frans,
E no goude Moïsez ac ive Salomon
Didostaït gant o furnez d'anima va halon.

Me o ped ive guez cedr deus menez a Liban
Hui poa n'henor da velet on tad quenta Adam
Ma recefot eur moment ar bonheur da barlant
O pije din me roet eur guentel buissant.

Neuze hui va Mestr divin zo gorre an evo
Sellit eur moment ouzin vit sehi va daelo
Roet din en abondans slerijen a speret
Da scriva gant eloquans va amzer dremenet.

Roet din anaoudeguez puissans a slerder
Da scriva va holl buez vel meus hoant den ober
Diasetit em halon ar vertus, ar furnez
Vit expliqua va rêson gant eur guir garantez.

Er blavesiou tremenet gant va hamarado
Dre bartout em boa heuillet an holl assambleo
Abars eur pennad amser ac eun nebeut goude
E hanveen en entier oll verhet ar hontre.

Anni garen ar muia a blije din parfet
Zo partout dre ar vro ma fleuren an oll verhet
A ne velan nemeti e ker na var ar mez
Ve crouet dam fantasi hervez va bolontez.

Ar studiet habilla demeus an doctoret
A zo bet bete vrema dre bevar horn ar bet
Ne halfe quet dont biquen gant e sescadurez
Da scriva gant e bluen graçou va guir vestrez,
Ar seis den fur deus ar Greç gant o habilite
Quichen squiant va mestrez o latin a golfe
Rac oma zeo ar turra deus ar grouadurien
Ac ive ar barfeta vale var bep tachen.
En amser ar roue Bel var ruiou Babylon
Ne voa quet eun demezel quer laouen a galon
Na coantoc'h princez epad amser yaouankis
Vrille quet e daoulagad er guer deus a Baris.
Digorit tout assemblez a levriou imprimet
Deus caeroc'h crouadurez jamez no deus comset
Biscoas Clemens Izaur ebars er jeu floro
Eur seurt boquet gant henor ne doa grêt e cado.
Ne sivoane quet avad er jardin a Eden
Eur blanten quer delicat na boquet na fleuren
Rac en amser dremenet brillantoc'h perlezen
Ne voa quet gant ar brincet en dro do hurunen.
Ar plant ros oa henori ar guer a Jeriko
A zeuffe tout da vœvi a golfe o graço
Equichen va guir vestrez va mignonez fidel
Objet par va harantez rosen gaer Breiz-Izel.
Neus quet e jardin ar plant e Paris e creis ker
E mesk fleurjou ar bed man dastumet en entier
Veler quet e no souez na ros na fleur de lys
Quer brillant a va mestrez fleuren ar yaouankis.
Da servez foar an neac'h ebars e nor hontre
Eve merhet avoalac'h da sevel eun arme
Veler quet deus a Dreguer, na Kerne, na Leon
Eur feumellen quer seder quer laoen a galon.
Deus a vro an Oriant betec an Ameriq
E zeo ar boquet ardant ar rosen magnifiq

Ar crincet henorapla ebars e no falez
Eur fleuren evel ouma na recevent jamez
Quenta moa bet ar bonheur da velet va mestrez
E voe decoret a fleur creis an amzer nevez
Quer laoen a quer brillant o pourmeno vale
Gant eun er divertissant e creis eun assamble.
Ac e moa y remerquet evel an eol ardant
Zo sclerroc'h vit ar steret pa bar er firmamant
En deis-se var an dachen o pourmen dirazon
Gant honneur er saluden eus a greis va halon.
Y respontas evidon da houde kement-se
Meuilfe partout a hanon gant guir fidelite
Pa rancontris m'en assur fura plac'h a velan
Tout oll charmou an natur droe ganin a unan.
An' oabl a voe quer sclêr eguis deur berlezen
Asuoc'h d'or pen en er oa qet eun nuagen
An eol a voa quer pur evel eun diamant
A sisqueze dan natur e rayonou brillant.
Me gleve ar rossignol a gantan e barez
En dizro deus an eol o cana assamblez
Ac ar musiq triomphant eus an oll lapousset
En eun devez quen ardant oa quer dous da glêvet.
Me a songe din neuze voant savet deus va bro
Var diouaskel eun uvre bete dor an evo
Mes an eol o tisquen var zu an horizon
Laque fin dan obaden dar recreation.
Aroc eun eum separi, dre gomsou eloquant
E remercién anezi gant eur galon ardant
Ac e lavaremp neuze an eil d'eguile
Qenavezo adarre ar henta assamble,
O tizrei deus ar pardon neur guittad anezi
Me a gane eur chanson vit eun eum amuzi
O tizrei var an avel va speret aliez
A nije ep diouasquel varzu ty va mestrez.

Quen aliez a ma teue an eol da bara
Asuoc'h pep assamble dre partout er vro-ma
Me a sante quer contant va halon o lempel
Eguis deur soudard vaillant o vonet d'ar brezel.

Me gave partout enno va holl gontantamant
Vit eun eum sivertissa ep trubuil na tourmant
Mes anoncet e voa demp ar profet el lavar
Ar plijadur ep anken ma quet var an douar.

Eus an amser evrus-se me a velas ractal
Eur moment e ne houde quer du a quer tenval
Tre an env ac an douar velen mui ar steret
An eol ac al loar a gaven tenvalet.

An natur en antier a sisqueze din-me
E rankfen kuittad va her va bro a va c'hontre
Quement ma va mignonet ne deo ket eur fablen,
An derves so annoncet ep dale na termen.

Da vonet dar rejimant gant va c'hamarado,
Da servich ar gouarnamant do souguen an armo
Eur seurt quelou c'hui entent zo ker trist da glevet,
A quittat va holl guerent, an dra-se zo kalet.

Me sonjas sevel neuze, kazi en eur greua,
Va horre menez Are, var ar roc'h huella
An amser en devez-se voa ker pur a ker skler
Ma velen tout ac'hane Breiz-Izel en entier.

Guechal Hercul eun dervez o kuittad ar bed-ma
A lake gant e vouez ar mor bras da greua
Ma recefen eur moment eur vouez ken ardant
Mag a roffe da glevet en arrondissamant.

Mije brema lavaret assamblez kenavo
D'am c'herent, va mignonet, va holl gamarado
A da houde me a gred en e kleo-deus ar mor
Va c'homzou vije klevet dre bartout en Arvor

Oh ! adieu menez Are montagn kaer Breiz-Izel
Divarnoud me a vele kalz a douriou huel,

Va daoulagad ne droent ket divar ar monumant,
Mo devoa'r chleier sonet devez ma badiziant.

Ennez a velen quer zorn vel eur geant immortel
Zo nos deiz e faction var dachen Breiz-Izel,
Mes pa zeuas em speret e rancfen sur brema,
Quittad va bro beniguet a parrez Commana.

Me a scuillas quer buen avoalac'h a zaelou
Evit beuzi va anken 'vit goelhi va bottou,
O teplori va zourmant me a velas raktal
A zindan ar firmamant eul lapous o nijal.

En eur sellet deus ountan en despet d'am glac'har
Me a halvas anezan vit disquen d'an douar,
Neuze din noa lavaret dre gomzou ken ardant,
« Gouzout a rit zoc'h galvet da vont d'ar rejimant.

« Me ho suppli va mignon pa sor deut d'ho quervel

« Na vezit ket digalon o kuittat Breiz-Izel,

« Achuet o quimiad a sec'hit o taëlo,

« Pa zoc'h deuet en oad da zifen o pro.

« Eun dever kaer a guirion hag ive necesser,

« Eo difen an nation brema e no c'hamzer,

« A ma rancfot combatti ous eur vro estranjour,

« Greno ket ho izili' eguis an dud treïtour.

« C'hui vezo fidel bepred evit arme o pro.

« Eur guir soudard na gren ket hete souffr ar maro.

« E ano ves inscrivet var ar rôl a henor,

« E vaillans caer a brudet a nijo dreïst ar mor.

« Astennit-ta eur pennad er chaden immortel,

« Zo staguet ous o troad e tronien Breiz-Izel,

« Kreskit enni ar maillo brema deus a bep pen,

« Pa zizroïot en o pro e pado da viken. »

Eul lapoussic quer koant hag e blu alaouret
Gant e guentel eloquant a galmas va speret,
Ma tizroen da velet ar femellen dispar
Gant ar Brovidans crouet vit orni an douar.

— Me ho salud va mestrez a gant guir galonad
Pa zeo deuet an dervez ma rankan o quitted.
E pep canton o clevet son an taborino
O c'hervel ar gonscrivet da vont d'an armio.

A c'hui va mestrez charmant ma chomet din fidel,
Ne santin quet a dourmant er mes a Vreiz-Izel,
Va c'halon, va c'harante, pezo vit recompans
Keit ma vezin en arme zindan drapo ar Frans.

— Me o suppli va mignon o comsou enorabl
O deus gonet va chalon neur feçon agreabl,
Partiet gant o vaillans d'ar plass ma zoc'h galvet
A deoc'hui en assurans vezin fidel bepret.

Pa vefot c'hui partiet er mez deus ar vro man,
Ganem-me vezac'h karet vel an eur a vrèman,
Goude ma vefot casset en tu all deus ar Frans,
Etrezec ennoc'h bepret nijo va esperans.

— M'ho remerci va mestrez o komzou eloquant
Gant o graç hag ho furnez laqua fin d'am zourmant
Pa vezin e liberte, va c'hongez achuet,
Me zizroïo adarre oun dervez do kueleit.

Composer ar chanson-man zo ganet er c'hontre,
Pa barlantoc'h deus ontan c'hui er galvo Herve,
Uguent vloas neus tremenet e parrez Commana,
Gant ar bonheur da velet an eol o para.

Eun den dister a speret o vont de regimant
Efin an nontecvet siecl pemp bloas aroc nao hant
En deveus e homposet creis e velancoli
En deziou moa partiet clasq eun eum amusi.

A brema camaradet gant eur galon ardant
Ganeoc'h vezo canet pa vin er regimant
Pa mo quitted va mestrez ma permet an ecleo
Me respontfe do mouez ma choman tost d'am bro.

Me c'houlen digan Doue neur zont da finissa
Vit quement den e cleffe pep chans vad er bed ma

Da houde vit recompans ar bonheur immortel
Da gavet o demeureans er Palez eternal.

FIN

Hervé-Marie MAGUET.

Chanson nevez Pot Commaná ac e Gontre

Dindan an oabl glas e bordic ar hoajou
Var ar haera plenen zo dindan an evou
Hui velfe ahanon vont da guittad va bro
Gant va halon beuset en eur mor a zaëlo.
Dindan o sclerijen astrou ar firmamant
E voa va flijadur va holl gontantamant
Zindan ar memeus eol var ar memeus douar
E ma va holl chagrin e ma va holl glahar.
Garfen quet trahissa va speret va rêson
Neus quet caeroc'h dever vit servich an nation
Ar soudardet ancien dre gals a exemplou
Ro demp ners a courage vit douguen an armou.
Mes dont da guimiadi deus querent a mignonet
Bars enem separi zo eur vicher galet
A quittan ar charmcu deus va bro beniguet
Ous pere va halon zo da viken staguet.
Er mez deus va hontre pa vezin partiet
Gant va guir daoulagat ne hellin o quelet
Eleac'h o contempli vel en amzer bresant
Ranquan o tilezel na pebeus chenchamant,
En amzer a zeuio ma zann varsu Bro-Mall
En deis na pad an noz ne glevin o crosal
Ar richerious bihan sisquen deus ar menez
Lod a za varsu Brest a lod all da Benzez
A gas davor ar Manch evel dan Atlantiq
An dour delicios deus va bro magnifiq
Decoret a bep-tu gant ar haera fleuriou
A sivoan quer brillant var bordic ar prajou.
Evit o eneadri goarimou araoulet

Zo curius a charmant a quer caer da velet
Gant o glazennou fleuriet ac o reier huel
O caera ornament eus va bro Breiz-Izel.
En dro dec'h ne glevin pad eun nebeut amser
Mouez an durzunel quer touchant a quer scler
Mouez an alhoeder ne glevin quet ive
Huelloc'h vit ar menez pignet varzu an è.
Me a gleve bemdes a bred deus ar mintin mad
Gant e guy eur chasseour o redec ar had
A hoarveze ganti evel gane brema
Eus a greiz e flijadur e ranque partia.
Quement-se so guirion me deu da lavaret
Pa ranquan sur quitted va holl gamaradet
Pa vezin partiet er mes demeus va bro
Varsuc ennoc'h bepred va speret a nijo
Ganeoc'h me a vele dindan ar firmamant
Partout dre ar vro-man cals a draou differant
En devechou a zeu n'hellin guelet brema
Torguen menez Are na bec tour Commana.
E pourmen er c'hontre o vale var bep rout
Tour huel va farrez velen deus a bartout
Cribellou ar menez a velen o luia
Zindan an eol ardant pa zeme da bara,
Hag a bep tu dezo kalz a artizanet,
O faouti ar men glas gant o morzol kalet,
Ar C'hernevot a lavar gant honor a respet :
Lojamanchou Breiz-Izel, zo ganeoc'h toet.
Pa sellen en dro din velen var bep tachen,
Partout var ar meziou kals a labourerien,
Vit ar peoc'h an union e ma o santimant,
E kreis o liberte ep anken na tourmant.
No toez me zo ganet en eur guer var ar vro,
Deoc'h tout neur finissa, lavaran kenavo,
Pa vin er regimant, me lavaro goude
Buez a gloar d'ar Frans hag honor d'he arme.

FIN

(Propriété de l'imprimeur)

Hervé Marie MAGUET